




# DCL BRETON

## Diplôme de Compétence en Langue

Session du samedi 29 mars 2014

# Mise en situation et Dossier documentaire

Mise en situation du candidat - Setu piv oc'h hag ar pezh ho peus d'ober		page 2 / pajenn 2
 Document 1	Ar Seizh Alc'houez	page 3 / pajenn 3
 Document 2	Unan, daou, tri	page 4 / pajenn 4
 Document 3	Nerzh nevez TELEBEV	page 5 / pajenn 5

## Setu piv oc'h hag ar pezh ho peus d'ober Mise en situation

### Gael HERE oc'h.

Nevez tutaet oc'h bet gant TELEBEV, tele lec'hel Gwened. Eilrener(ez) ar programmoù oc'h.

Karget oc'h da zibab un abadenn e brezhoneg evit ar re yaouank hag a vo skignet bep Merc'her etre 4 eur 30 ha 5 eur d'enderv e lec'h an abadenn "A vos marques!".

Rakdibabet ho peus div abadenn. Evit gouzout hiroc'h hag ober ho soñj da vat e pellgomzoc'h d'ho rener, Gwenn Ar Meur.

Da c'houde e kasoc'h ho kinnig dre lizher da Yann MacGregor, prezidant meur TELEBEV.

### Vous êtes Gael HERE.

Vous venez d'être recruté(e) par TELEBEV, la télé locale de Vannes. Vous êtes directeur(trice) adjoint des programmes.

Vous avez été missionné(e) pour choisir une émission en breton à destination de la jeunesse qui sera diffusée chaque mercredi entre 16h30 et 17h à la place de l'émission « A vos marques ! ».

Vous avez présélectionné deux émissions. Pour vous aider dans votre choix, vous appellerez votre directeur(trice) Gwenn Le Meur.

Vous rédigerez ensuite une lettre présentant votre choix à Yann MacGregor, Président Directeur Général de TELEBEV.

### **KAEL PROGRAMMOÙ AR MERC'HER / GRILLE DES PROGRAMMES DU MERCREDI**

10:00 : TRESADENNOÙ BEV  
 11:15 : UN DEN PEDET  
 11:30 : REKIPE MA MAMM-GOZH  
 12:00 : DOAREIOU / LES NEWS  
 13:00 : QUESTIONS POUR UN BRETON  
 13:30 : L'INVITE  
 13:45 : HISTOIRES DE BRETONNES  
 14:30 : ARABESQUE  
 15:15 : ARABESQUE  
 16:00 : DESSINS ANIMES  
**16:30 : A VOS MARQUES (émission jeunesse)**  
 17:00 : A VOUS LES ADOS !  
 18:00 : QUOI DE NEUF ?  
 18:30 : KELEIER AR C'HORNAD  
 18:40 : LIV AN AMZER  
 18:45 : QUOI DE NEUF ? DEUXIÈME PARTIE  
 19:30 : L'ACTUALITE DU PAYS DE VANNES  
 19:40 : METEO  
 19:45 : PLUS DURE LA VIE  
 20:30 : FILM : LA LANDE  
 22:10 : MUZIKOPAYS

**Diell 1 :**

Un abadenn skinwel evit ar grennarded sevenet ha kenproduet gant Gwengolo Filmoù eo «Ar Seizh Alc'houez». Diazezet eo war ar vitologiezh keltiek ha krennamzer. Filmet eo bet pep lodenn en ur gumun disheñvel bet dibabet diwar binvidigezh he istor, ar pezh a gas ac'hanomp d'ober ur seurt Tro Breizh.

A-hed ar seizh rann enrollet e 2013 e vez pedet skipailhoù skolajidi pe liseidi gant Viviana, ur gorriganer, da adkavet pep hini eus ar seizh alc'houez bet kollet. Evit-se e rank ar c'hoarierien diskoulmañ sekredoù, kompren kodoù. Klask a reont skoazell war ar genrouedad gant sikour un iPad. C'hoarioù sport a zo ivez : tennañ gant ar wareg, sachañ ar gordenn, emgannoù kleze ...

Pal pennañ «Ar Seizh Alc'houez» a zo lakaat ar grennarded da gaout plijadur dre ar brezhoneg ha daremprediñ gant brezhonegerien yaouank all e-korf un abadenn 15 munutenn.

**Diell 2 :**

Un abadenn-c'hoari nevez e brezhoneg evit ar vugale etre seizh ha dek vloaz eo « Unan, daou, tri ». Produet eo bet e fin 2013 gant Brezhoweb ha sevenet gant BSM Production.

Enrollet eo bet e kumunioù disheñvel gant skolidi o tont eus pep korn Breizh.

Lakaat a ra daou skipailh bugale da c'hoari an eil a-enep egile. C'hoarioù jestraouiñ, preder hag amparted a vez kinniget d'an arvesterien yaouank. Etre ar c'hoarioù e vez skignet tresadennoù-bev a live gant oad ar vugale.

Joséphine ha Léo, an daou animatour, a gas buhez d'an abadenn e-pad 23 munutenn gant fent ha startijenn.

Pal pennañ an abadenn-mañ a zo lakaat ar re yaouank da vevañ ur prantad plijus e brezhoneg ha da vezañ aktored ar skinwel brezhonek a-vremañ.

**Diell 3 :****Nerzh nevez TELEBEV**

Tri blez goude bout ganet e tiviz TELEBEV adkempenn he frogrammoù evit roiñ muioc'h a bouez d'an abadennoù e brezhoneg. Dec'h, e studio nevez-flamm TELEBEV Gwened e oa pedet pennoù-bras ar Rannvro da zizoloiñ raktresoù nevez ar chadenn. Tro hon eus bet da atersiñ Yann MacGregor, ar prezidant meur.

**Abadennoù nevez ?**

« Divizet hon eus kinnig abadennoù nevez evit kas àr-raok ar chadenn ha bout tostoc'h da dud ar vro. » Displeget en deus Yann MacGregor e faote da TELEBEV digor ar programmoù àr sevenadur ar vro : ar yezh, an istoer, ar glad, ar sonerezh. « Get "Histoire de Bretonnes" e vo tu da Yann Pellarvestour anavout buhez maouezed brud-divrud ar vro a-hed ar c'hantvlezadoù. "Muzikopays" a roay tro deomp da veajiñ e bed sonerion ar vro, koulz klasel èl hengounel hep ankouaat ar sonerezh a-vremañ. »

**Hag ar brezhoneg ?**

Pouezet he deus Lenaig ar Bleiz, kannadez Rannvro, àr blas ar brezhoneg e programmoù ar chadenn. « Kalonekaet eo bet TELEBEV da ziorren niver an abadennoù brezhonek ha kenlabour zo bet get Ofis ar Brezhoneg. Evit monet àr an hent-se e vo sikouret ar chadenn da skigniñ e brezhoneg get argant ar Rannvro. »

**Pellarvestourion nevez ?**

« Chom a ra labour d'ober àr dachenn ar yaouankiz. Skignet e vez abadennoù evit ar re yaouank e galleg ha tresadennoù-bev e brezhoneg. C'hoant hon eus da ziskouez dezhe eh eus brezhonegerion a oad gete, éc'h implij ar yezh dre c'hoarioù a-fet. » eme Yann MacGregor hag a-benn nebeut e vo dibabet get ar skipailh an abadenn a goucho ar gwellañ get ar c'hoant-se.

**Ur choaz evit an dazont**

Goude bout dielfennet ur sontadeg kaset get studierion klewelet Skol-veur Roazhon a-ziàr lec'h ar brezhoneg er mediaoù o deus komprenet tud TELEBEV o doa, int ivez, ur roll da zerc'hel e dazont ar yezh.

« Un dra a bouez eo evidomp ! » en deus kadarnaet ar prezidant.

M. A-D

# **DCL BRETON**

**Diplôme de Compétence en Langue**

**Session du samedi 29 mars 2014**

## **Mise en situation et Dossier documentaire**